

D'an 9 a viz Eost

- E 258, e Roma, merzherenti **sant Romanus**.

Hag eñ soudard, e voe lakaet da wardour sant Laorañs a oa karc'hariet. Gwelout a reas un ael deuet da frealziñ an diagon santel hag e voe gonezet d'ar feiz. Badezet gantañ, e voe diskuliet gant e geneiled, kondaonet da vezañ torret e izili a daolioù bazh ha dibennet dirak ar *Porta Salaria*.

- D'an 9 Eost 1942, en Auschwitz, **santez Tereza-Benedikt ar Groaz**, Edit Stein eus e anv plac'h, karmeziadez ha merzherez, diskleriet kenbatromez Europa e 1999.

Ganet ha desavet er yuzevegezh e Beslau en Alamagn e studias ar brederouriezh hag e voe kelennerez. Gonezet d'ar C'Hrist e c'houlennas ar vadeziant hag ez eas da garmeziadez da gentañ e Kolun ha da c'houde e Bro Holland evit tec'hout rak ar renad nazi. Hogen e voe harzet eno ha kaset d'ar c'hampoù-tolpañ.

- E Breizh, **sant Herle**, diagon ha merzher, patrom Ploare e Kernev.

- En Iwerzhon, er VI^{vet} kantved, **sant Felim**, eskob Cill-Mór, diskibl sant Koulmkell.

- En Iwerzhon c'hoazh, er VII^{vet} kantved, **sant Nathi**, abad hag eskob Achonery.

- E Breizh, er XVII^{vet} kantved, **an Tad Mikael a Sant-Maloù**, kabusin.

- D'an 9 a viz Eost 1641, d'he 38 bloaz, distro da Zoue ene **Mamm Marc'harid eus santez Agata**, leanez karmeziadez e manati Nazared e Gwened, c'hoar d'an Tad Visant Huby, genidik eus an Henbont.

Reiñ a reas skouerioù uhel a binijenn, a sentidigezh, a reoliadur, a guñvder hag a habaskted.

D'an 10 a viz Eost

- E 258, e Roma, merzherenti **sant Laorañs**, arriagon.

Pa voe berzet al lid kristen gant Valerianus e voe harzet a-gevret gant ar pab sant Sikst II hag e ziagoned hag int lazhet war an taol. E vuhez dezhañ a voe espernet gant ar spi e rofe madoù an Iliz a oa bet fiziet ennañ. A-fet teñzor e tiskouezas ar beorion maget ha gwisket e mizoù an Iliz. Neuze e voe kondaonet da vezañ dêvet war ur grilh hag e c'hounezas kurunenn ar verzherion tri devezh goude ar pab.

Kaset en dije d'e gerent e Bro-Spagn ar C'halir Santel, hini ar Goan ziwezhañ, bet fiziet ennañ gant ar Pab Sikst kent e verzherenti hag a vez miret en iliz-veur Valensia.

- E 258, **Merzherion santel Aleksandria**, lakaet d'ar marv da vare heskinadeg Valerianus. Diwaskañ a rejont lies jahinerezh ijinet gant o bourevion.

- E 304, e Roma, **santez Filomena**, merzherezh.

He relegoù a voe adkavet e katakomboù santez Prisolha e 1862 gant an enskrivadur *Filumena* hag e voent kaset da vMugnano e Campania a-beban ma kreskas he c'helerezh dre ar bed a-bezh. Brudet eo bet gant ar burzhudoù a voe lakaet war he anv gant Person santel Ars.

- Er VI^{vet} kantved e Roma, merzherenti **sant Deodatus**.

Hag eñ kereour eus e vicher e kont sant Gregor diwar e benn ez ae bep sadorn da reiñ d'ar beorion ar pezh en doa gounezet evito e-doug ar sizhun.

- E Breizh, **sant Laouren**, manac'h kehelet e Plegad-Moezan lec'h ma kaver ur feunteun yec'hedus dindan e baeroniezh. Kv parrez *Treveren* er Paoudouvr, eskopti Sant-Mac'hloù.
- E Breizh-Veur, er VI^{vet} kantved, **sant Gerent** - Gereint e kembraeg - lesanvet "tad ar sent", tiern Devnon, tad sant Grelann, mab speredel sant Teliav.
- E Bro-Skos, er VI^{vet} kantved, **sant Blan**, eskob Kingarth, burzhudour.

D'an 11 a viz Eost

- En III^{de} kantved, e Roma, merzherenti **santez Suzanna**, gwerc'hez.
Hag hi ur plac'h gaer ha desket e nac'has kinnig dimeziñ Maximianus mab an impalaer Diocletianus a gasas dezhi daou gefridiad a voe gonezet d'ar feiz drezi ha dic'houzouget war un dro ganti. Ur brientiliz e Roma a zo gouestlet dezhi abaoe ar IV^{re} kantved.
- E 288, e Roma, merzherenti **sant Tiburz** a zo bet meulet gant ar pab sant Damaz.
- E 625, **sant Geri**, eskob *Camarac* (Cambrai) hag abostolour Bro-vBrabant.
Ur chapel a ziazezas a voe penn-kentañ kêr-vBrussel.
- E 670, **santez Agilberzh** (Gl. Aguilberte pe Gilberte), eil abadez Jouarre goude he c'heniterv santez Teodekild.
Bez' e oa merc'h Abolin, breur Mod, eil gwreg sant Autherius, ha Piencia, c'hoar sant Ebregisil, eskob Melda, hiziv Meaux. Sebeliet eo e kev-iliz Jouarre.
- E 1253, en Asizi, **santez Klara**, gwerc'hez, abadez, diazevourez Urzh an Itronezed Paour pe Klarised.
Entanet gant galvidigezh sant Frañsez e tilezas surentez he ziegezh evit mont da heul "Itron ar Baourentez" hag e tiazezas kouent San Damiano.
- E Breizh, er VI^{vet} kantved, **sant Ergad pe Gwergad**, manac'h e Landevenneg.
Enoret evel abad e Treouergad e Bro-Leon, ez eo patrom iliz Pouldergad e Kernev.
- E Breizh, war-dro 1020, **sant Ehouarn**, penitiour, diskibl sant Felis Reviz; drouklazhet e voe gant hailhevoded.
- En Iwerzhon, er V^{vet} kantved, **santez Attracta**, abadez Cill Athracht, c'hoar sant Konnel abad-eskob Eachroim.
- En Iwerzhon, er V^{vet} kantved, **santez Liadhan**, a savas un iliz e-kichen Luimneach ; merc'h da zDiarmuid a voe badezet gant sant Padrig.
- En Iwerzhon, er VI^{vet} kantved, **sant Donnan**, abad breur sant Ciaran Clúain Mhic Nóis.
- En Iwerzhon, **sant Aleran**, lesanvet *Ar Fur*, manac'h e Tamlacht.

D'an 12 a viz Eost

- Er IV^{re} kantved, en Ausbourg e Suevia, merzherenti **santez Hilaria**.

Gonezet d'ar C'hrist war un dro gant he merc'h santez Afra a oa bet merzheriet seizh devezh kent e voe harzet p'edo o pediñ war bez homañ a-gevret gant teir matezh Digna, Euprepia hag Eunomia ha dre ma nac'hjont kehelañ an doueez Gwener e voent lazhet dre an tan.

- E 731, merzherenti **sant Porker hag e geneiled**, menec'h enezenn Lerina lazhet gant ar Sarazined.

- E 1641, e Moulins, ganedigezh en neñvoù **santez Janed Franseza a Chantal**.

Intañvezet goude eizh bloavezh a briedelezh en em ouestlas da gentañ da zesevel he fevar bugel. Neuze, dindan renadur sant Frañsez a Sal he ambrouge er "Vuhez Deol" e tiazegas urzh leanezed ar Weladenn (*La Visitation*) e Kêr-Annecy.

- E 1689, e Roma, **ar gwenvidig Inosant XI**, pab.

Pastor karantezus a gredas mont eñ e-unan da intent ouzh ar vosennidi e ouarnas an Iliz gant furnezhh e kreiz diaesterioù liesseurt. Talañ a reas ouzh Loeiz XIV roue Bro-C'hall en doa graet emglev gant an Durked hag o annouezhe da gerzhout davet Wien. Ne dermas ket kennebeut da ziskleriañ e oa didalvout "Disklêriadur an Iliz gallikan" aozet gant Bossuet war c'houlenn Loeiz XIV.

- E Breizh, er VI^{vet} kantved, **santez Klerwi**, merc'h sant Fragan ha santez Gwenn, c'hoar sant Gwennole.

- En Iwerzhon, er V^{vet} kantved, **santez Attracta**, abadez Cill Athracht, c'hoar sant Konnel abad-
eskob Eachroim.

- En Iwerzhon c'hoazh, er V^{vet} kantved, **santez Lelia**, gwerc'hez.

- En Iwerzhon, er VI^{vet} kantved, **sant Muirdeach**, eskob-abad Cill Alaidh.

Ezel eus tiegezh ar roue Laoghaire e voe eskobet gant sant Padrig hag e echuas e vuhez evel penitiour war enezenn Inis Muirígh.

- En Dalriada (Skos), er VI^{vet} kantved, **sant Molaiz**, manac'h, kofesour sant Koulmkell en enez Iona.

D'an 13 a viz Eost

- E 235, **sant Pontian**, pab ha **sant Hipolitos**, beleg, merzherion.

Hipolitos, doueoniour brudet, en doa savet ur gumuniezh disrannat, hogen, e-kerz heskinadeg Maximianus, e 235, e voe kaset d'al labourioù ret e Sikilia war un dro gant ar pab Potian. Eno e varvjont, an eil hag egile, merzherion ar C'hrist. Ar pab Fabian a lakaas degas en-dro o c'horfoù da Roma hag e voe lidet o obidoù an hevelep deiz, an trizek a viz Eost 236.

- E 460, ganedigezh en neñvoù **santez Eudisia**, impalaerez. Merc'h ur prederour eus Athenai, e timezas gant an impalaer Theodoz.

Mont a reas da birc'hirinañ da Jeruzalem a-beban e tegasas relegoù sant Stevan da gKêrgustentin. Tamallet e gaou da vezañ disfeal e rankas mont en harlu d'an douar santel lec'h ma varvas.

- Er VI^{vet} kantved, distro da Zoue ene **sant Dorothea eus Gaza**, penitiour en Egipt.

Miret eo bet ur c'hant bennak eus e lizhiri hag e *gKemennou d'ar venec'h* a ro un testeni prizius eus stummidigezh speredel ar mare.

- E 587, e Pictavia, **santez Radegond**, rouanez.

Hag hi priñsez Thuringen, e voe dimezet dre heg da gKlotar I^{añ} roue ar Franked. Gant asant he gwaz e resevas ar ouel eus daouarn sant Medar gant reolenn sant Sezer Arelate hag en em dennas e Pictavia e abati ar Groaz Santel bet savet gant he gwaz eviti, goude m'he dije bet un tamm relegenn eus ar Groaz gant an impalaer Justin II. Deuret gant doareoù ar venec'h kelt ez eas da gejañ gant sant Yann ar Vouster e Chinon hag e vije deuet da biric'hirinañ e Breizh.

- E 662, **sant Maksen ar feizvonnour**, abad manati Chrysopolis a-dal da kGêrustentin.

Hag eñ doueonour gredus da zifenn ar gwir feiz e voe heskinet gant an impalaer disivout Contantius, e voe troc'het e zorn dehoù hag e voe harluet e Menezioù ar C'haokaz lec'h ma varvas.

- E 1621, e Roma, d'e zaou vloaz warn-ugent, ganedigezh en neñvoù **sant Yann Berchmann**, lean.

Ganet e Bro-vBrabant ez eas da neveziad kerkent hag e seitek vloaz gant Jezuisted Malignes. Goude e leoù e voe kaset da Roma da genderc'hel gant e studioù. Studier aketus ha donezonet, e voe chalet da lakaat ar pezh a denne d'ar reiz da blegañ evit mat ar vuhez speredel.

- En Iwerzhon, er VI^{vet} kantved, **sant Fachtnan**, eskob-abad Ros Ailithir e kontelezh Corcaigh, diazeour ur skol vrudet.

- En Iwerzhon, e 1134, **sant Ever** – Eimher en Iwerzhonég -, eskob Ard Macha, a adsavas e iliz-veur.

- En Iwerzhon, , e 1579 e Cill Mocheallóg, da vare ar rouanez Elizabeth I^{añ}, **ar gwenvidig Patrick O'Healy**, eskob Mayo, ha **Conn O'Rourke**, beleg, frañsiskaned o-daou. Pa voe dizoloet e oant beleion e voent kondaonet d'ar marv ha roet da voureviadur ar groug.

- E Breizh, er XVII^{vet} kantved, **ar gwenvidig Fuljañs a Santez-Barba**, karmezad.

D'an 14 a viz Eost

- E 1480, Otrante e Puglia en Italia, merzherenti **sant Antonio Primaldo** hag e geneiled, merzherion.

Pa voe tapet ar gêr gant an Durked e voe kaset war-dro 800 annezad e-maez ar mogerioù ha gourgalket da zinac'hañ o feiz. Broudet gant Antonio Primaldo, gwiader eus e vicher e talc'hont divrall hag e voent dic'houzouget holl.

- E 1941, distro da Zoue ene **sant Maksimilian Kolbe**, beleg frañsezat a-gouent ha merzher eus Polonia.

Aet d'e c'hwezhek bloaz, e 1910, e kouent Frañsiskaned Lvov e tiazezas Bezen Mari Dinamm ha Keoded ar Werc'hez Dinamm hag e astennas un abostolerezh sebezus betek Bro-Japan. Hangaset e-doug an eil brezel bed e meur a gerc'har e kinnigas e vuhez e kamp-bac'h Auschwitz o kemer lec'h

un tad a diegezh barnet da vervel gant ar sec'hed hag e varvas derc'hent gouel Pignidigezh ar Werc'hez d'an Neñvoù.

- E Breizh, **sant Merven**, manac'h, paeron Lanvaelvonn a oa un enklozadur eus eskobiezh Dol e-kreiz Bro-Sant-Maloù.

- E Breizh, en IX^{vet} kantved, **sant Riowen pe Rion**, manac'h e Redon, diskibl sant Konvoion, penitiour war an enezenn a zoug e anv stag ouzh Perroz-Hamon, enezennad eus Dol e-kichen Plæraneg.

D'ar 15 a viz Eost

- **Gouel Meur Savidigezh d'an Neñv ar Werc'hez Vari**, Mamm hon Doue hag Arloz Jezuz Krist a voe, e penn he buhez war an douar, uhel savet en he c'horf hag en hec'h ene da glod an neñv. Sed kelennadurezh ar feiz o tont eus Hengoun an Iliz bet termenet ent-lidel e 1950. Rouantelezh Bro-C'hall a voe gouestlet e 1638 d'ar Werc'hez savet d'an neñvoù gant ar roue Loeiz XIII diwar gemennoù ar C'Hrist d'ul leanez eus Breizh, Anna-Vari eus Jezuz Kroastaget, Anna de Goulaine eus he anv plac'h yaouank.

- En III^{de} kantved e Roma, **sant Tarsisius**, merzher.

Sant Damaz a zanevell penaos p'edo ar paotr yaouank o tougen ar Sakramant e voe taget gant un engroez paganed hag e kavas gwelloc'h bezañ labezet eget lezel an eukaristiezh da vezañ haleget ganto.

- E 1257 e Krakovia, **sant Hyacinthus**, beleg dominigat.

Goude e studioù e Krakovia e wiskas sae ar vreudeur brezegennion e Roma pa oa bev c'hoazh sant Dominig. Kaset e voe gantañ da ziazezañ an urzh e Polonia gant ar re wenvidig Ceslas hag Herri ar German hag e astennas e abostolerezh betek Prusia ha Rusia.

- E 1568 e Roma, **sant Stanislas Kostka**, neveziad jezuist.

Priñs polonat yaouank speredek ha youlek, e reas e studi e Kêr-Vienna. Mennet da vont e Keneilezh Jezuz daoust d'e dad e tec'has diouzh e di d'e 16 bloaz evit mont da Roma war droad. Erbedet gant sant Pêr Kanisius e voe degemeret gant sant Frañsez Borgia hogen e varvas daou vloaz goude skedus e santelezh.

- Er VI^{vet} kantved, **sant Aez** - Aedh MacCarthán en en iwerzhoneg - , eskob Clochar, diskibl sant Padrig.

- Diazeidigezh iliz **Itron-Varia Keloù-Mat e Roazhon** lec'h ma virer un ikonenn vurzhdus.

